



MA
DOUSIK
KOANT

AR YEODET (BOCHER)


Gand he e'hoef digor d'ann avel,
Hi oa e-ghiz eun durzunel,
Pa'nem zispleg he diou askel.



Er voure'h, goude ar gousperô,
Ann holl a lâre, trô-var-drô :
« Houn-neg eo flouren ar' vrô ! »

(BRIZEUR)

Kinniget d'am muia karet.



MA
DOUSIK
KOANT

AR YEODET (BOCHER)

Gand he c'hoef digor d'ann avel,
Hi oa e-ghiz eun durzunel,
Pa'nem zispieg he diou askel.



Er voure'h, goude ar gousperô,
Ann holl a lâre, trô-var-drô :
« Houn-nez eo flouren ar vrô! »

(BRIZEUK)



Ma Dousik Koant

✕ ✕ ✕ ✕

D'am muian karet.

Kanet em euz war ma zelen entanel
Ma Breiz-Izel,
He giziou fur, he zent koz, he zud vrudet,
He yez santel;
Hirie da stenna stard d'ezi he c'herden,
Me am euz c'hoant
Ha kana warni dre eur zonik laouen
Ma dousik koant ! (*diou wech*)



Ma dousik koant ! N'euz plac'h abed evelti
War an donar,
Evit kredi eo red gwelet anezi,
Bleuen dispar !
Diwanet kaer en eun draoniennik a Vreiz,
Ha hi ken drant,
Eno he kav heol ha gliz-veure a-leiz,
Ma dousik koant ! (*diou wech*)

Ma dousik koant! Henvel eo deuz eun aelik,
Dous ha tener...
He daoulagad zo glaz, lirzin, birvidik,
Dalc'hmad seder,
He zellou don leun a spi, a garante
Zo eur zeblant
Dimeuz kaerder ha levez hec'h ine,
Ma dousik koant! (*diou wech*)



Kaer dreist peb tra ez eo ma muian karet,
Ma ferlezen!
He bleo ken flour a zo du ha klaouieret
War he zal gwen;
He diou chod ru 'ro d'ei kemend a c'hened,
Ma laran drant
Ez eo ar c'hoantan en touez an holl verc'hed
Ma dousik koant! (*diou wech*)



He mouez sklentin a gomz d'in ken frealzuz
En eur grena,
Ma trid em c'hreiz ma c'halonik evuruz
Ha leun a joa...
He c'hân zo kaer evel hini an eoned,
Eveltan drant,
Ouz e glevet 'nijan beteg ar stered,
Ma dousik koant! (*diou wech*)

Evel ma plich d'an durzunel he c'hoajou,
Hi gar ive
Tremen didrouz en kreiz zioulder ar maeziou
He zam bue;
Eno ar blijadur zo talvoudusoc'h
Evid arc'hant,
En gwirione eno e karan muioc'h,
Ma dousik koant! (*diou wech*)



Ma dousik koant!... Oh! pa ven en he c'hichen,
Evurusted!
Siouaz, pell, pell diouti, pebez anken
Ha poan-spered...
Me a garfe tremen ma amzer dalc'hmad
Hep nec'hamant,
Evel he mouezik, gwelet he daoulagad,
Ma dousik koant! (*diou wech*)



Ac'han d'an devez ma vefomp unanet
'N eil d'egile,
E hirvoudin d'am dousik meurbed karet
Ha noz, ha de...
Ha goude enpad hon zammik buegez
Me gano drant,
Da c'hortoz mont gand Doue d'al levez,
Ma dousik koant! (*diou wech*)





Moulet e ti A. LAJAT, ru ar

Feunteun, Montroulez, an

10 a viz ebrel 1907 Ʒ Ʒ



Moulet e ti A. LAJAT, ro nr

Feunteun, Montroulez, an

10 n viz abrel 1907 ʎ ʎ